

# GUERZ AR GARNEL



Demp d'ar Garnel, Christenien, güelomp ar Religou  
Eus hor breudeur, c'hoarezet, hon tadou ha mamou,  
Demeus hon amezeyen, hor brassa mignonet,  
Güelomp ar sta' truezus e pini int rentet.

Guelet e reot aneze torret ha brozonet,  
Ha memes an darnvia a zo e poultr rentet :  
Ne veler moi o noblanc, o danvez, o guenet,  
Ar maro hac an douar o deus o distrojet.

Ar paour hac ar pinvidic, ar mestr hac ar sujet,  
Oll e zint rentet héovel, oll dizenvélebet ;  
Ne zeus moi nemet esqern, poultr ha breinadurez,  
Dign eus a gompassion hac eus a bep truez.

Hoguen er stat truezos e peini int rentet,  
E parlantont e langach mod elocant meurbet  
Ous peb-unan a c'hanomp, mar qeromp profita  
Qeit ma blijo gant Doue hon lezel er bed-mâ.

Clévit eta anezo, ha grit attention,  
En dezir da brofita eus a greis ho calon :  
Lavarat a ria deoc'h e zlo bet er bed-mâ,  
Hac e varvfot evlto pa sónjot nebeuta.

Ni zo bet var an douar o r'en quer coulz hac'houi  
O parlant hac o vele, o'h eva, o tébri,  
Hac ceto amâ bremâ ar stat ma zomp rentet,  
Goude m'omp bet en douaro o vezur ar préned.

M'oa un den crén ha galant, ha me un dijentil,  
Me voa un den pinvidic, ha me un den habil ;  
Me meus collet va noblanc, ha me va oll danvez,  
Me va nerz ha va guenet, ha me va güiziegnez.

N'hon euscavel er bed-mâ nemet hon œuvrou mad  
Da bresanti d'or Barner, d'non Roué ha d'non Tad ;  
List eta madou'o douar, detesti ar viçou,  
Hac ornit mad hoc'h ene a bep seurt vertuziou.

Mar goulennit diganemp pelec'h êt bon eneou,  
Ni respouto : d'ar purgator, rac honnus è hor brô ;  
E maïnt en tan o tévi vit peur-baea o dle  
Contractet var an douar da justiq un Doue.

Eus e ouelet ar flammou ne cessont o crrial,  
O c'houlen hor pedennou, ma ellint sortial  
Eus ar prisoniou teval e pere int tolet ;  
Hastit d'hor zicour, ha na zaleit qet.

Déch-hu en em adresseomp, qerent a mignonet,  
Da gaouet memor arc'hanomp pa zit dre ar véret.  
Lavarit en eur dremen : Doue ra bardouno  
D'an anaon er purgator, rac ennes è hor brô.

Un alouen, ur beden grêt gant devotion :  
Ur yun pe un oferen, pe ur gommunion,  
A ell calz hor soulaji ha berrât hor poaniou,  
Hac hon tenn en un instant a ouelet ar flammou.

C'houi, Béleyen charitabl en eus or c'hunduet,  
En hent hor zilvidiguez, pa edomp var ar bed,  
Cuntinuit c'hoas en nebeut da gaout trues ouzomp,  
Oc'h ober, dre drogare, œuvrou mad evidomp.

Ispicial o pedomp pa deuit da celebri  
An Oferen en ilis, élèvit neuze hor c'hi  
Eus a ouelet ar flammou o c'houlen diganeoc'h  
Ma teuot d'ober gant Doue dre'r Sacrifig hor peoc'h.

Ha p'or bezo peur-baeet ar boan dle et d'or pec'het,  
Ni hor bezo déc'h neuze digant Doue reqet.  
Pedit, ni a raï ive ; en em sicouromp oll,  
Ennes vezo ar voyen ne deuyo den da goll.

Evel an dour o vouga an tan-goall alouet,  
An tan eus ar purgator a vez ive mouquet  
Dre ar Sacrifig sanctel offret var an Anter,  
Da c'houlen hon delivranç ouz Doue hor Zalver.

Pa zorti an eol squeudos a zindan ar goabren,  
Ar bed oll en un instant a receo sclérijen :  
Ni a zortio ive sclér evel ar stered  
Eus ar poaniou a zouffromp dre'r Sacrifig offret.

Adieu tadou ha mamou, bredeur ha c'hoarezet ;  
Adieu, querent, mignognat ; adieu déc'h, tud ar bed ;  
Ni a ra bremâ déc'h hor c'himiad diveza ;  
Adieu déc'h : quen a vo en traouyen Josapha.

Roit ar repos éternel, va Jesus, va Autrou,  
D'an oll eneou fidèle pere zo er flammou,  
Ebars en ho Parados, da veuli da James  
Assambles gant an oll Zent ha gant an oll Aëles.

Piou ac'hanomp, va Doue ! n'en deveus divoeret  
Un tad, ur vam, urboguel, querent all, mignonet ?  
Biziom-ta o beziou ba pedomp a galon :  
Un douçer an tenerra eo d'ar c'christen güirion.

Daoulinet var o beziou, e credomp fermamant  
En ur bedi evito, int d'hor speret presant.  
Lavaromp-ta evito, gant hor mam an ilis,  
Ur Miserere mei hac un Deprofund's.